

CANTIC SANTEZ ANNA

Var tou : Ave, ave, ave, Maria.

Diskan :

Enor, Bennoz da zantez Anna,
Meulomp, meulomp ar vam ar wella.

Kanomp a vouez huel
Mam goz hon Doue ;
Ni holl e Breiz-Izel,
Zo he bugale !

Nijit a denn-askel
Elez ann' Envou,
Ha gant tud Breiz-Izel,
Savit ho moueziou.

Bleuniou euz ar prajou,
Ha c'houi labousset,
Stered euz ann' Envou
Lavarit bepred !

Ha var ar meneziou
Koulz ag enn draonien,
Ann encleo d'ho moueziou
'Respounto laouen !

Guechal hor bro geiz
Siouas ! oa renet
Dizoue, difeiz
Gant an Droug-Speret.

Mam ar Verc'hez Vari
A bedas Jesuz
Va Zalver emezi
Bezit truezuz !

Evit'ho 'peuz skuillet
Ho coad preciuz
Ganeoc'h int bet prenet,
Truez, o Jezuz !

Mam ar Verc'hez Vari
Bennoz d'oc'h hano,
Pedit evid'homp-ni
Dionallit hor bro !

Evel heur rouanez
Varn'omp c'hui a ren
Bezit hor patrounez
Hirio, da vilken !

Keit a ma vo bleuniou
E brük ar menez
D'hor mam hor c'halonou
'Zalc'ho karantez.

Mam ! en hor bro geiz
Guechall bro ar Zent
Nevezit ar Feiz
Evel ma voa kent !

Kuzit hor bugale,
Dindan ho mantel !
Keit a ma vo arne
O va mam Zantel.

Soudardet Breiz-Izel
Ken star en' emgann
A c'houlén ho skoazel
Pa vent' kreiz an tân.

Martolod 've klevet,
Pa dreuz ar mor doun :
« Santez Anna-Vened,
Pedit evid'houn. »

Pleget var an dachen
Labourer douar,
Evel peb guir gristen
Bepred a lavar.

O klask eun tam bara
E harz toul an' or
Kân...paour Santez-Anna,
Te gavo digor !

Allaz ! nag a boaniou
Guez varn'homp bepred,
Blonset eo kalounou
Kalz tud euz ar bed.

Nag a dristidigez,
Ran-galoun, anken,
Er bed-ma aliez
A zo lod an den.

Dirag Santez-Anna
Paour ha pinvidik
It 'ta da zaoulina
It tud reuzeudik

Va c'haloun 'zo skuizet,
Mam, Santez-Anna
Mont d'an env d'ho kueleth
A garje brema !

Euruz en 'ho kichen
Ni 'velo Jezuz
Ni gano da viken,
Mam garantezuz !

En env' gant ar Verc'hez
Da Grouer ar bed,
Gant ar Zent, an Elez
Ni 'gano bepred :

Enor, bennoz, da Zalver ar bed,
Da zantez Anna, mam ar Vretouned.

J. S.

Imprimatur :

DU MARHALLACH, VIC. GEN.